

Du-mañ da gostez parrez

Du-mañ da gostez parrez, Ge tron la traladira (Pe : "O lon la la digetra")
Du-mañ da gostez parrez, ez eus ur plac'hig koant
Ez eus ur plac'hig koant, ez eus ur plac'hig koant

He deus tri amour fidel Ge tron la traladira..
He deus tri amour fidel Me 'oar pehini eo he c'hoant
Me 'oar pehini eo he c'hoant, Me 'oar pehini eo he c'hoant

Ar c'hentañ 'zo keginer
An eil 'zo paotr ar gambr

'n trede 'zo ur c'hozh kere
Hennezh eo tout he c'hoant

Hag eñ deus graet ur botoù
Demeus e lèr lijer [pe : "botoù e lèr lijer"]

Ha pa 'oa graet ar botoù
D'o c'has d'ar gêr oa aet

En ur esaeñ ar botoù
Dezhi 'deus lavaret

"O me 'garje, koantennig
'vin ho kentañ pried ['vit ho kaout da bried]